

ISSN 0246-5396

AL LANV

niverenn 6

DU/KERZU 1980

9 lur



pennad-stur

Donedigezh Gwynfor Evans da Vreizh a zo bet an darvoud istorel pouezusañ evit ar Vretoned abaoe pell. Rener Plaid Cymru strollad Kembre, a zo deus da Vreizh evel trec'hour, nevez pilet gantañ diviz tref-tour Thatcher da nac'hañ reiñ ouzh Kembre o fevare chadenn skinwele kembraeg. Den brudet-tre e Kembre, div wech kannad e Westminster, e teue gantañ skiant-prenet pobl Kembre. Skiant-prenet en ur stourm dizehan evit emrenezh o bro, o yezh, o gwirioù a-enep ar Saozon. Stourm sanket don e kristeniez brotestant pobl Kembre hag en he doujañs evit buhez mab-den ez eo bet dre vras ur stourm difeuls hogen a-enep al lezenn bep tro ma veze ret. Diazez ar stourm kembraek a zo disheñvel-tre dre o istor, o emskiantegezh a gumuniez kembraek, ar soñj he deus ar bobl kembraeger da vezañ lod eus ar "werin", ar stourm evit ar justis hervez pennaennoù ar relijion ha kalk a draoù all hag a zo da zerc'hel kont pizh outo a-raok lakaat ar memes traetoù war hor c'heñvedoù boutin. Rener ur stourm disheñvel diouzh hon hini, hogen kannad ar bobl geltaek nesañ deomp e teue Gwynfor Evans d'ober ur gwel kentelius d'e vreudeur tramor.

En e-unan a anzave ne oa ket nemeur a spi gantañ e-keñver dazont ar brezhoneg en ur zont da Vreizh. A-raok mont kuit e lavare e oa bet kalonekaet gant an nebeut devezhoù tremenet en hor bro hag e yae kuit leun a fiziañs. Degemeret en un doare ofisiel gant ti-kêr Roazhon en doa bet tro da gejañ gant tud ar c'huzul-kêr hag o strolladoù diforc'h gant kalzik a dud ivez a stourm hiziv-an-deiz evit dazont hor pobl hag hor yezh. En un doare sklaer en deus displeget d'ar gazetennierien er C'hlub de la Presse e Roazhon e kondaone gouarnamant ar C'hallaoued da vezañ lazher pobl Vreizh hag he yezh. Atav en un doare sioul en deus displeget d'an dud bodet e ti Tachenn Veurz en emvod foran istor pobl Kembre hag ar stourm o deus renet betek bremañ. Ouzh ar Vretoned evel pobl e komze Gwynfor Evans, outo en deus lavaret hag ad-lavaret e oa ur bobl e Breizh hag e oa an dra-se ar pep pouezusañ a c'halled lavarout diwar-benn Breizh. Outo ivez en deus graet ar goulennoù-mañ e ti Tachenn Veurz :

- Hag-efñ e soñjit ez eus ur boble Breizh ?
- Hag-efñ e fell deoc'h e kendalc'hfe ar bobl-se da vevañ ?
- Ma' z eo YA ho respont, penaos emaoch'h e soñj seveniñ ar mennad-se ?

Ar goulennoù-se ne c'heller ket tremen e-biou dezho. Evidomp e respontomp e rankomp sevel deomp un dazont istorel dizalc'h evel pobl ha n'eus pelloc'h e Breizh strollad na luskad ebet a vefe barrek d'han ober.

TAOLENN

SKEUDENN AR GOLO M. MALGORN

PENNAD-STUR	p. 2
GWYNFOR EVANS E BREIZH	p. 3
POLONIA	p. 8
INERZHON	p. 10
SONEREZH INDIA	p. 11
FILIPIG DERO	p. 14
DIVIZ GANT GWELTAZ	p. 21
LOENED GOUEZ BREIZ	p. 24
FILMOU	p. 25
LIZHIRI HA KEMENNOU	p. 27
SONEREZH	p. 30
GERIOU-KROAZ	p. 31
TELEUE	p. 32

AL LANV CFPAP : 62602

Kelaouenn diskleriet hervez Lezenn

kerzu 80

Moulet e Bretagne Ateliers,
146, st. An Oriant, ROAZHON

Rener : Padrig An Halask

Koumanantoù : - 50 lur (boutin)
- 80 lur (skoazell)

Da :

AL LANV, 7 st. ar rektor P. Henry,
35000 ROAZHON.

gwynfor evans e breizh



Pa'z eus bet klevet e oa Gwynfor Evans o vont da ziouerif boued, betek mervel diouzh ret, evit ober d'ar gouarnamant saoz doujañ d'e bromesaou, o deus soñjet tud Kuzul ar Brezhoneg e vije a-bouez dezhañ dont da Vreizh evit komz eus e stourm. Aozet e oa bet an traoù evit ma teufe G. Evans da Vreizh d'an 3 a viz Here; be' oa da greñf gant e yun d'ar 6. Aesoc'h e vije bet dezhañ e-giz-se kaout sikour digant ar Vretoned. Pleget en deus ar gouarnamant saoz a-raok ne grogfe zoken gant an diouer-boued. Ken-se e oa bet divizet ampellaat ar weladenn.

D'al lun 17 a viz Du eo erruet Gwynfor Evans e nijva Dinaz; marteze eo bet souezhet un tamm o welout un tregont bennak a dud ouzh e c'hortoz hag o klevout hiniou ha bombard o seniñ ton broadel Kembre (ha Breizh war un dro). Ur bame a zo bet en nijva, hag ar brezegennig a zo bet graet gant Per Denz. Gant ur c'harr eus an ti-kêr eo bet kaset da di-kêr

ken brav Sant Malo evit un degemer all, hag ur pred en deus bet e ti Gwenn ha Dodik, arzcourier vrudet Sant malo, arack pennadif hent Roazhon.

Diwar neuze eo bet leuniet mat e zevezhoù. D'al lun en deus Gwilet skol Diwan Roazhon, Mikael Briant o vezañ skolaer diwar dro e-lec'h Naning Ar Me. Gwilet en deus ar gêr gozh, Ti ar Parlament, ar Skol-Veur. Da greisteiz eo bet degemeret da zebrif gant Kuzul-Kêr Roazhon: ur pred ne oa ket hepken ur pred, met ivez ha marteze dreist-holl un diviz; ur c'huzulier a oa eno a-berzh ar pevar strollad a zo er C'huzul hag un nebeut tud a-berzh Kuzul ar Brezhoneg. Da noz eo aet da velout film ar Garreg diwar-benn Flogo: un deiz bennak e c'hello ar film-se bezañ diskouezet e Kembre.

D'ar merc'her ez eus bet ur weladenn da Virdi Breizh, dindan renerezh Y.Ch. Veillard. Dedennet bras eo bet G. Evans gant an Istor; savet en deus ul levr a-bouez diwar-benn istor Kembre a zo bet troet e saozneg. Goude-se ez eus bet un diviz e " Club de la Presse ", leun-chouk evit an degouezh. Eno, evel e pep lec'h a-hed e veaj en deus komzet e kembraeg; jubennet e veze gant Per Denz. Souezhet avalc'h eo bet kazetennerien zo o klevout komz diwar-benn emzalc'h sevenadurel Bro C'hall e Breizh, eus " gwakerezh ": ar pezh a ziskouez pegen aes e vez boazañ ouzh an diwezhañ hag ouzh ar wakererezh, a seblant dont da vezañ stad naturel an traoù. Un tamm pred a-gevret 'zo bet paket goude en un osteleri e-kichen. Aze oa un nebeut mignoned deut da gejañ gant G. Evans: Ronan Huon hag e wreg, Yann ar Beg hag e wreg, Ivonig Giquel, Yann Jegou ha re all. Goude kreisteiz ez eus bet enrollet un abadenn gant Fanch Broudig, Gwynfor Evans ha Per Denz. Rozenn Vilin, kembraeg flour ganti, a oa jubennourez. Unan eus degouezhoù pouezus ar veaj a zo bet goude: un degemer e ti-kêr Roazhon. En anv ar C'huzul e oa eno an Dr. Guillard, Y.E. Duval ha J. Normand. En ur brezegenn eus ar re wellañ en deus lavaret heñañ e oa ret da Vreizh kaout ur statut emren.

An deiz war-lerc'h eo aet G. Evans d'an Naoned. Da gentañ, gweladennif skol Diwan. Klasket ha kavet eo bet ar skol en ur mell savadur 5000 den o chom heñañ. Ur weladenn all da di ar Faperioù Kozh, evit teurel ur sell war baperioù ar Stad Vreizhat: ur gwir defzor d'an istorour, ma vefe studiet. Kelennerien istor Naoned ne seblantont ket bezañ dedennet evit ar mare! Da greisteiz eo bet degemeret G. Evans e ti an Ao. hag an It. Gab ar Mosl, e-lec'h ma

oa bet e wreg o chom tregont vloaz arack! Goude-se, gwelout plasenn ar Bouffay (enc eo bet dibennet Ponkalleg hag e vignoned) bez Fransez II, ar C'hastell, mirdi ar verdeadurezh, ar gêr gozh, ha neuze degermer en ti-kêr, gant ur brezegenn sklaer hag entanet a-berzh Lionel Divard. Tu en deus bet goude-se da gomz gant Michel Crépeau, arack bezañ degemeret er CNOC gant stourmerien Ero Naoned. Da noz, distro da Roazhon, eo bet en absenn azet gant Dastum er Mirdi.

D'ar gwener vintin en deus Gwynfor Evans kuitaet Breizh. Ur gemennadenn d'ar Vretoned en deus embannet arack mont kuit.

diviz gant g. evans

(troet diwar ar c'hembraeg)


A.L. - Ha gallout a rafec'h lavarout deomp petra eo bet stourm ar pevare chadenn e Kembre? Petra eo disoc'hoù ar stourm-se?

G.E. - An disoc'hoù eo hon eus gounezet kaout un akt, a zo tremenet dre ar Parlamant, a ro deomp ur servij kembraek a grogo e 1982 gant 22 eurvezh bep sizhun a abadennoù kembraek mes marteze muic'h. Bez e c'hellfe bezañ 25 eurvezh, an dra-se a vo hervez pegen prest e vo ar mezh diaoù, hag an eurvezhoù-se a zo da vezañ skignet da gentañ-holl da eurvezhoù selaouadeg vras, d.l.e., etre 6 e 1/2 ha 10 e da noz. Ni felle deomp kaout anezh holl d'an eurvezhoù-se a-benn kaout ur froud abadennoù didroc'h dre ma'z eo tuet an dud da lakaat ur chadenn ha da chom gant ar chadenn-se, hogen bez' ez eus lod eus tud an tele a gred e tlefed lakaat abadennoù evit ar vugale vihan hag un nebeut abadennoù all gwech ha gwech all e dibenn an endervezh. Ma, da Gembreiz o-unan eo da zivizout war gement-se ha n'eo ket da Londrez. Ur bodad kembraek a reno war ar servij-se, un aozadur a reont eus ar c'horfi-se, "Aozadur kembraek dizalc'h", kement-se a zo ur c'hammed bras war-raok. Skignerien ar B.B.C. ha reoù tele Harlech, d.l.e., an embregerezh kenwerzhel, a zo en em vodet en ur gevredigezh skignañ a aozo an abadennoù-se hag a daolo ur sell war ar pezh a zegouezho. An unvaniezh,

ar c'henlabour-se a zo mat-tre, kloz-tre ha klok-tre, ha ne vefe ket c'hoarvezet an dra-se ma ne vije ket bet gounezet ar servij-se war ar pevare chadenn. Mes evit ar mare en em ziskouez skedus-tre an dazont.

A.L. - Petra a sojfit eus ar chadennoù-all? Ha ret e vo kaout abadennoù'zo ivez e kembraeg war ar chadennoù-se pe war ar chadenn kembraek hepken?

G.E. - Ne vo abadennoù kembraek ebet war ar chadennoù all bremañ. An holl abadennoù a vo treuzkaset war ur chadenn. Kinnig ar gouarnamant a oa rannañ an abadennoù etre div chadenn virelezhel, ha kement-se da eurvezhoù-fall, sur-tre. Da forzh pet eur etre kreisteiz hag hanternoz. Ne gredan ket e vije bet posupl tamm ebet gounit selaourien dalc'hus da sellout ouzh abadennoù a seurt-se. Mes bremañ dre ma vo kinniget asambles an abadennoù ha kement-se war ur chadenn e kredan e vo posupl krouif ur selaouadeg gaer.



P. an Habask, rener AL LANV
ha Gwynfor Evans o tivizout

A.L. - Ha ne gredit ket emañ Kembreiz digembraeger o vont da dreif kein ouzh ar yezh dre ma vo tu dezho sellout ouzh abadennoù saoznek hepken war ar chadennoù all?

G.E. - Troet o doa kein ouzh ar yezh dija. Un abeg da gaout ar servij-se a oa o doa tost an hanter eus arvesterien Kembre troet o rastelloù-tele war-zu abadennoù Bro-Saoz ha setu ne welent ket an abadennoù saoznek eus Kembre hep komz eus an abadennoù kembraek, ne c'hoarvezze ganto gwelout un abadennoù kembraek n'eo war dre vare. Dindan steuñv ar gouarnamant, an hini a zo bet trec'hat bremañ, ne vije bet gwelet nemet nebeut-nebeut a dud, rak an div chadenn virelezhel, d.l.e. B.B.C 2 hag I.B.A. 2, an div chadenn a oa bet choazet gant ar gouarnamant ne oa nemet 15 % eus an dud a selle outo n'eus forzh penaos. Ne vije bet eta nemet un niver bihan-tre a dud da sellout ouzh an abadennoù kembraek e-skoaz bremañ, d'an men e vo kalz muic'h dre ma'z int bet lakaet asambles.

A.L. - Petra vo ar c'hammed a zeu bremañ? Kembraiz o deus gounezet ar pevare chadenn, ar vroadelezh kembraek a ya war-raok, petra vo ar c'hammed nesañ evit frankiz Kembre?

G.E. - War an dilabour eo e poaniomp ar muiañ bremañ. Ur vosenn spontus e teu an dilabour da vezañ e Kembre. Bez' ez eus ouzhpenn 12 % eus tud hor pobl dilabour dija, an dra-se a dalvez ez eus tost da 140 mil anezho hep labour ha kreskiñ a ra dalc'hmat o niver. A-raok diwez ar bloaz a zeu e vo ouzhpenn 200.000 a dud dilabour e Kembre. Stad an traoù a zo grevus-spontus hag an dro-mañ n'eus tu ebet deomp kaout labour e Bro-Saoz evel ma oa a-raok ar brezel, abalamour n'eus ket a labour eno kennebeut, bez' ez eus dilabour e Bro-Saoz. Neuze e vevont er haourentez, hep netra d'ober, stad distrujus-tre, spontus eo bezañ dilabour evel-se e-pad pell. Stourm a ramp ouzh ar vosenn-se ha goulenn groms ma vo krouet labour da Gembreiz e Kembre.

A.L. - Petra eo politikerezh armerzhel Plaid Cymru? Petra eo ivez politikerezh yezhel Plaid Cymru?

G.E. - Politikerezh armerzhel Plaid Cymru da gregiñ. Ma, an dra gentañ eo e fell deomp gwelout Kembre o tiorren hag o tiorren en un doare kempouez, diorren anezhi en un doare ken klok ha ma'z eo posupl, diorren hec'h holl binvidigezhioù

danvezel, barregezhioù he zud ivez, ober an dra-se en ur steuñv evit Kembre. Bis-koazh n'hon eus bet steuñv ebet evit Kembre, an aozadur nesañ en deus prientet ur seurt steuñv eo Plaid Cymru. Talvoudus-tre eo bet an dra-se ha neulet-tre eo bet gant kalz a aozadurioù. Ar gouarnamant, avat, n'en deus morse prientet steuñv ebet evit Kembre. Setu an dra gentañ a zo d'ober ha dindan ar steuñv-se diorren an holl servijoù: hent, hent-houarn, tiez, deskadurezh teknik h. a. . . evit ma vo ingalet an traoù a-ozave evit an dud war an tachennoù lec'hel, e-kefver diorren an ijinerezh.



Per Denez ha Gwynfor Evans
o weladenniñ Roazhon

A.L. - Bez' ez eus kalz a Vretoned yaouank o'n em c'houlenn petra eo savboent Plaid Cymru, ma'z eo kevalour, mirour pe sokialour?

G.E. - Ma, hon strollad a zo bet enep-kevalour adalek an derou. N'omp ket mignonned d'ar gevalouriezh hag enebet hon eus outi hag ouzh hec'h efedoù fall. A-hend-all ez on a-enep ma vefe anvet sokialour hon politikerezh, daoust ma ra kement-se marteze an darn vrasañ eus hon izili. Lavarout a reont ez int sokialourien, mes, evidon, eo ar sokialouriezh dastum ar galloud er gouarnamant, d.l.e. e daouarn un nebeut burokrated. Ar se a c'houarn en anv ar bobl, hor poli-

tikerezh-ni a zo ar c'hontrol, ar pezh a fell deomp ober eo digreizennañ ar galloud, kaout ur gouarnamant gwan e-lec'h ur gouarnamant kreñv totaliter ha degas ar galloud etre daouarn an dud. Setu petra eo hon politikerezh deomp. Erafec'h politikerezh sokialour eus kement-se pe get, eo marteze un afer diouzh doare pep hini.

A.L.- Petra eo ho tarempeoù gant ar sindikadoù ?

G.E.- Ar sindikadoù, evel just, a penn-da-benn a-du gant ar strollad labour Bremañ eo disheñvel stad an traoù er broioù-mañ, e Breizh hag e Bro-C'hall. Strollad ar sindikadoù eo ar strollad labour. Int o deus krouet anezho, int a a zalc'h anezho hag hep o c'hensikour a yafent da get. Ne vefe ket mui a strollad labour. Ne c'hellomp ket esperout eta kaout sikour ar sindikadoù drezo o-unan. Ar pezh a c'hellomp esperout hag hon eus dija tizhet kalz eo kaout skolezenn izili ar sindikadoù. Treiñ a reomp daveto dalbec'h, mennet omp da unanif an emsav labour e Kembre ouz an emsav broadel, peogwir ma ne zeuomp ket a-benn d'ober kement-se n'eus spi ebet da asurif na frankiz Kembre nag ar justis evel ma fell deomp en hor bro.

A.L.- N'eus sindikad kembraek ebet ? Me gred ez eus ur sindikad kelennerien, n'eus ket ?

G.E.- Eo, bez' ez eus ur sindikad kelennerien kembraek, ur sindikad labourerien-douar kembraek, bez ez eus un nebeut re evel-se mes n'eus sindikad greantel ebet hag en ijinerzh emañ an nerzh evel just. Nac'het en deus kendalc'h ar sindikadoù labour degemer sindikad kelennerien Kembre.

A.L.- Petra eo politikerezh-yezh Maid Cymru ha petra eo ho tarempeoù gant Cymdeithas Yr Iaith ?

G.E.- A-viskoazh en deus roet Plaid Cymru ar plas kentañ d'ar yezh kembraek. Kalz, kalz a dud a sell ouzhomp evel ouzh ur strollad yezhel. Kement-se a zo bet displetus deomp dre ma vevenne hon levezon. Pelloc'h ez eus pevar C'hembread diwar-bemp a zo digembraeger. N'eo ket un dra vat, neuze, e vefe sellet ouzhomp evel ouzh ur strollad-yezh hag abalamour da se e krouas Plaid Cymru Cymdeithas Yr Iaith. Ni eo a grouas anezhi. Lanset e voe gant kuzul labour Plaid Cymru evit kaout ul luskad da lakaat e holl strivou war ar yezh.




A.L.- Kredif a rit ez eo un dra vat kaout ur strollad yezhel distag diouzh ur strollad politikel ?

G.E.- Ya, en degouezh-mañ hag evit an abeg emañ o lavarout. Graet e vez ganomp ur strollad-yezh ha neuze e soñj d'an dud ne gomzont ket kembraeg n'eus ket lec'h evito er strollad. Gwelout a rit, displetus-bras eo evidomp, kredif a reont ne reomp nemet war-dro ar yezh. Ha, da skouer, e kreñva c'hoazh ar stourm diwezhañ an dra-se e spered an dud, kredif a reont'omp chalet nemet gant ar yezh. Mes kement-se n'eo ket gwir tamm ebet. Diziouer eus deoc'h kaout ur strollad yezh diforc'h o pledif a-zevri gant ar yezh hag o kas en-dro e labour en ur mod disheñvel diouzh ar pezh a c'hell ober ur strollad politikel. Er renk kentañ hon eus atav lakaat ar yezh, daoust da se, en em gannet omp start-tre evit an deska-durezh kembraek, ar skinwel kembraek, ar c'hembraeg er vuhez ofisiel ha foran dre gaout ur savlec'h ofisiel d'ar yezh. Loc'het hon doa ur skrid-gouenn a zastumas tost da 1/2 million an vioul just a-raok ar brezel. N'hon eus morse graet war-dro ar yezh nemetken daoust d'ar brud stag ouzhomp, bez' ez eus kalz, kalz a traoù all en hor program evel just ha rankout a reomp pledif ganto ivez.

A.L.- Ha spi a zo da gaout frankiz evit Kembre er bloavezhioù da zont ?

G.E.- Ma, tost omp bet da gaout un dra a oa ur c'hammed war-raok warlene, un akt a oa tremenet dre ar parlamant ha kement-se a oa un truj paet da nerzh ar vroad-elouriezh kembraek. Bez e oamp da gaout ur gannet dilennet gant kalzig a c'halloud

war aferioù diabarzh Kembre, ar gannet-se ne vije savet avat nemet diouzh berzh ar referendom war he divout. Faezhet eo bet an akt er referendom hag an dra-se dreist-holl abalamour d'ar strollad labour, daoust ma oa ar strollad labour e Kembre evel strollad a-enep hag a-enep start. Pep ezel eus ar strollad labour er vro a laboura a-enep ha setu perak e c'hwitas en un doare spontus ar referendom. Mes a-benn bremañ en deus an disoc'h-se lakaat an dud da brederiañ, bez ez eus ur sañfiant er vro e vo ret kaout ur parlamant da Gembre ha bez e c'hell an dra-se dont a-raok ma soñjomp.



An doare he deus Breizh-Veur da greizennif ar galloud e Londrez e-barzh ur vro vras gant ur gouarnamant hepken evit 55 pe 56 million a dud, an dra-se en deus c'hwitet, emañ o vont a-dammoù. Neuze e vo ret kaout un digreizennerezh ha gant an digreizennañ e vo ret kaout ur bodad dilennet evit Kembre da ober war-dro traoù' zo eus he vuhez, ar pezh e c'hellomp lavarout a dra-sur eo ur wech ma vo ur bodad dilennet bennak e Kembre ne vo ket pell a-raok ma fello da Gembreiz ober an hent penn-da-benn peogwir e vint deut boas d'en em ren o-unan war un nebeut traoù hag ouzh gwelout e ya an dra-se en-dro, ez eo un dra vat, e kredan e yelo war gresk ar santimant da vezañ kembreat, an emskiantegezh kembraek, hag e fello dezho en em ren o-unan evit kement tra a sell ouzh o buhez.

DIOLCH - TRUGAREZ


Setu ni erruet gant niverenn diwezhañ AL LANV... evit ar bloaz, eveljust. Alies eo bet start al labour ha treut ar c'hef. Sikouret omp bet gant mignoned, ha trugarekaat a reomp anezho holl. Gant o sikour eo ha gant labour ingal ar genlabourerien omp deuet a-benn da lakaat AL LANV war an hent mat. Embannet hon eus ur 160 pajenn bennak. Klasket hon eus brudañ stourm ar minorelezhioù, sevenadur ar Vretoned hag ar stourmoù e Breizh ivez. Ma fell deoc'h keleier e brezhoneg eo arabat deoc'h disoñjal adkomanantif. Ret eo bet deomp kreskiñ priz ar c'homanant: 50 tur eo bremañ. Ar chomlec'h, avat, n'en deus ket chenchet... Ur soñj mat e vefe d'ar re a resev dija AL LANV ober deomp ur prof NEDELEG dre goumanantif ur mignon dezho. Peditiñ a reomp hor c'homananterien nevez da venegif resis gant peseurt niverenn kreñv da gas dezho' hor c'helaouenn. NEDELEG LAOUEN HA BLOAVEZH MAT D'AN HOLL

WANIG ha WENIG

Koumanant : 40 Tur

CCP Roudaut 29/1-51 Rennes


Sekretourva : M. L. FAVE, KERNONZ
29250 KASTELL-PAOL



POLONIA

D'ar 14 a viz Eost e krog trubulioù strollad komunour bro Polonia gant ar bobl. An deiz-se e tiviz micherourien ar chanterioù sevel-bagoù e Gdansk ober grev peogwir e oa bet skarzhet ur vicherourez a rae war-dro ar sindikad nann ofisiel. 14000 micherour a ziskrog eta gant o labour. Bez e oa bet c'hoazh kudennoù en abeg da briz ar c'hig dreist holl ha tud lazhet gant an arme goude emsavadegoù 1970. D'ar 14 a viz Eost ne seblant ket ar gouarnamant bezañ re brederiet gant an diskrog-labour. Daou zervezh goude, avat, e vez savet ur c'homite (MKS) evit difenn gwirioù al labourerien. Micherourien Szczecin a chom ivez a-sav gant o labour. Goulenn a ra ar MKS digant ar gouarnamant sinañ un emglev war 21 poent resis, ar poent puezhusañ o vezañ krouidigezh ur sindikad dieub.

PETRA C'HOULENN AR SINDIKAJOU DIEUB?



Bez ez eus ivez goulennoù diwar-benn roll an Iliz, leve ar re gozh, diskleriadur Helsinki hag hini mab-den, adaozadur an tele hag all... Daleañ a ra Edward Gierek e veaj da vro Alamagn hag asantif a ra prederiañ war ar c'hudennoù-se. Kondaonif a ra ivez an "enep-sokialourien" a fell dezho "sevel un afer politikel". Goude un nebeut devezhioù leun a brederiadennoù frouezhus e vez harzet un 20 den bennak tost ouzh ar c'h/KOR, un emsav krouet e 1976 evit difenn ar vicherourien. An taol bazh-se ne lak ket youl al labourerien da vont war wanaat. D'an 21 e tiviz ar gouarnamant kas Jagielski da gomz gant al labourerien o stourm. Goulenn a ra an Iliz digant ar grevisted "bezañ fur". D'ar 24 en em vod Komite Kreiz ar strollad komunour. Edward Babuch a ro e zilez ha galvet e vez Jozef Pinkowski da bennministr ar gouarnamant. D'an 31 a viz Eost e vez sinet gant Jagielski ha Lech Walesa, rener MKS Gdansk, an emglev.

Adkregiñ a ra al labour e chanterioù Gdansk d'an deiz kentañ a viz Gwengolo, met evit gwir emañ an emsav o krefvaat. Klafv e kouezh Gierek ha ret eo dezhañ bezañ kaset d'an ospital. Stanislav Kania a gemer e blas. Klask a ra neuze ar gouarnamant touellañ ar vicherourien. Ne fell ket dezhañ diskleriañ ar sindikad dieub Solidarność (Kengred) hervez lezenn. Gourdrouz a ra ar sindikad e vo un diskrog labour er vro a-bezh ma ne zalc'h ket ar gouarnamant d'an emglev. Goude ur sizhun e kil ar gouarnamant: asantet e vez statudoù ar sindikad gant al lez-varn.

Ma n'eus ket bet kalz a ziskleriadurioù ofisiel gant ar C'hremlin e penn kentañ an emsavadeg, ar vignoned feal n'int ket chomet mut, pell ac'han. Honecker, an Alaman, a dagas an "enep-sokialourien" paeet, hervezañ, gant ar gapitalourien. Husak, paotr Praha (ur mailh war ar gudenn peogwir eo deut d'ar galloud gant an tankoù rusian e 1968) a zisklerias e oa skeud ar CIA o plavañ war ar sindikad emren. Abaoe ur pennadig e vez tagadennoù start a-berzh mignoned ar C'hremlin ha trenk eo deut an darempredoù da vezañ etre an daou Stad Alaman.

Ar gudenn evit ar sindikad a zo gouzout penaos e teuo a-benn da c'hounit an emverezh el labouradegoù hag an emrenezh politikel hep bezañ kastizet gant ar Rusianed. Setu ar skoilh

8

war hent ar frankiz. En diabarzh eo ret d'ar sindikad stourm ouzh burokrated ar strollad ne fell ket dezho koll an dreistwiroù o deus. En diavaez eo ret dezhañ ober gant imor an Unvaniezh Sovietel. Betek-hen en deus pleget ar galloud dirak ar vicherourien. Met pegeit e pado? War c'hortoz e chom breur bras ar Reter. Sammet eo gant e vrezel distruj en Afghanistan ha gouzout a ra ar c'hasoni a vez maget gant ar bobl boloniat evitañ. Bev eo c'hoazh lazhadeg Katyn e memor ar bobl... Kas a raio koulskoude e dankoù pa soñjo dezhañ emañ e "interestoù pennañ" en arvar, da lavarout eo: 1. Arabat eo e vefe gwanaet sistem difenn ar vro, ha dre-se Pakt Varsaw. 2. Na savfe er vro un nerzh politikel all o stourm ouzh ar strollad komunour.

Setu aze bevennoù hent ar frankiz. Kenderc'hel a ra koulskoude ar vicherourien gant ar stourm.

STEVEN

PETRA C'HOULENN AR SINDIKAJOU STAD?



AL LIAMM

DA RAKPRENAÑ
BETEK AR 1^{añ} A VIZ GENVER 1981

RONAN HUON
UR VOUEZH ER VORENN
26 pe 32 lur hervez
ar paper

YOUENN OLLIER
E PENN AN HENT
30 lur

DIDROUZ
TRUEZ VA DOUE
29 pe 40 lur hervez
ar paper

Da J. QUELLE, 47 straed Notre Dame, 22200 Gwengamp.
CCP 1136 82 Roazhon
Lakaat 10% ouzhpenn ur wech echu ar rakpren

Ar bed Keltiek

LEVRIOU - PLADENNOU - ARZ KELTIK
RENER : GWELTAZ AR FUR

2, straed ar ROUE GRADLON

kemper
pgz : 95.42.82

9

Iwerzhon

BEZ EË EUS IWERZHONIZ O VERVEL E TOULL-BAC'H LONG KESH DRE YOUL AR GOUARNAMANT SROZ !

Ouzhpenn ur miz 'zo o deus divizet seizh republikan eus toull-bac'h Long Kesh ha teir republikan eus prizon Armagh Gouarnamant betek betek ma vefe roet dezho ur statud politikel. Laeret eo bet ar statud-se diganto gant gouarnamant Callaghan e 1976 (gw. AL LAMV niv.3) " Kendalc'het 'vo betek ar marv. En toull emomp peogwir e stourmomp evit ar frankiz hag ar wirionez. " Setu ar pezh a lavar ar brizonidi. " Muntrerien int. Ra varvfenet ma fell dezho. " Setu respont ar gouarnamant saoz. Abace an 30 a viz Du emañ ar seizh republikan e klafvdi ar prizon. Tri anezho a zo e stad fall-tre. Ne fell ket d'ar gouarnamant saoz plegañ.

Testeni Tommy Mc Ginn dieubet nevez 'zo eus Long Kesh.

" Bevañ a reomp evel loened. War-dro 8 metrad karrez 'ra pep kambr. Heugus eo ar boued a vez roet deomp da zebriñ. Goloet eo moericioù ar gambr gant ar c'haoc'h. Alies e vez boued o vreinad en ur c'horn. Flaeriañ a ra. Dic'hallus eo deomp kaout aer fresk. Bevañ a reomp el loustoni. "

Perak ha penaos ez eer da Long Kesh ?

Pa vez harzet unan bennak, e vez kaset da g/Castlereagh, an aliesañ. Aze e vez goulenataet gant paotred ar RUC (pols Iwerzhon ar 6 kontelezh). Setu amañ un nebeut doareoù implijet ganto evit lakaat ar brizonidi da anzav ez int " torfedourien ". Diskuliet eo bet an doareoù-se gant Denis Paul ha Raymond Murray, daou veleg, o deus skrivet ul levr diwar-benn prizon Castlereagh.

1. Taolioù war ar penn, al livenn-gein, ar c'hellou, an dremm.
2. Flac'hadoù kenbred war an divskouarn evit terriñ taboulin ar skouarn.
3. Taolioù bazh hag implij an tredan.
4. Skuilhet e vez dour e divskouarn ar brizonidi.
5. Rediet e vez ar brizonidi da lipañ dour, staot pe dislonkadennoù war al leur. Kalz hiroc'h eo al listenn... Mervel a reer ivez, evel Brian Maguire e 1978 kavet stag ouz ar group. Ar re ne varvont ket a anzav n'eus forzh petra: digor eo hent Long Kesh.

Istor Patricia Mc Garry

Kavout a reer an diskleriadurioù-mañ e levr " Trade Unions and H-Blocks " embannet en Iwerzhon gant an " National Smash H-Blocks Committee ".

Patricia Mc Garry, ganet e 1959, dilabour. Harzet e 1977. He breur Jack a zo e Long Kesh, kondaonet da 25 bloaz toull. Bevañ a ra e familh e Ligoniel. E miz Eost 1975 e voe lakaet an ti da darzhañ gant ur vombezenn. Mont a reas ar familh da vevañ en Ardoyne, unan eus ar c'harterioù paourañ ha krignet gant an dilabour. E-pad daou vloaz e vez hegaset ha goulenataet Patricia tost dezhe gant ar RUC. E miz Even 1977 e vez harzet ha c'hwec'h plac'h all war un dro.

" Diouzhtu on bet goulenataet en un doare rust. Padout a rae survezhioù, noz ha deiz. Ne oa ket tu din kousket. Kannaet ha kumjennet on bet. Lavaret 'veze din traoù lous diwar-benn ma c'ho-

rezed. Pa oan er gambr, ne oa ket tu din kousket : enaouet ha lazhet 'veze ar gouloù dizehan. Kannaet on bet gant merc'hed ivez. Ur wech e lakaas unan ac'hanon ouz ar voger. Palvata a reas ac'hanon. Skein a reas ouz ha chouk ha bewech ez ae ma fenn da stokañ ouz ar voger. Un eur hanter e padas ha goude kreisteiz e voe mestrata, gant paotred ar wech-mañ. Fellout a rae dezho lakaat ac'hanon da anzav em boa lakaet bombez evit an IRA. Dek devezh goude hezañ bet harzet int deut da glask ac'hanon da eizh eur. " Ar wech-mañ e vo ret dit anzav " o deus lavaret. Klasket o deus terriñ ma divskoaz dre warañ ma divrec'h. Leñvañ ha yudal a raen. Neuze en deus unan dalc'het ma daouarn a-dreñv ma c'hein e-pad ma skoe egile taolioù mailh-dorn war ma dremm. Goude teir eurvezh, em eus chouet : petra fell deoc'h gouzout? Skrivet o deus un diskleriadur ha sinet m'eus. Sinet m'eus teir all c'hoazh, goude. Gevier eo, ha netra ken. "

Barnet ha kondaonet eo bet Patricia Mc Garry da zek vloaz toull-bac'h. Abace ar 7 a viz C'hwevrer 1980 emañ-hi o klemm gant merc'hed all e prizon Armagh evit kaout ur statud politikel.

GW. DENEZ

sonerezh India

Dacust da vroioù ar reter pellañ bezañ e darempred a bell'zo gant reoù ar c'hornog, n'eus ket tu da lavarout koulskoude ez eo bet levezonet sonerezh an eil re gant hini ar re all. Sonerezh a-vremañ broioù ar c'hornog a zo dezhañ un toullad mat a stummoù dishevel ha liesdoare, endroet diwar skouer ar sonerezh-pobl, dezhañ perzhioù dibar a gaver dre ar bed-holl, ha neuze' ta, er reter pellañ. Ar re a labour war sonerezh an henvroioù kenkoulz ha war o sevenadurioù, a oar e veze anavezet, da skouer, unan eus ar skeulennoù koshañ (ar skeulenn bempnotenek) er bed a-bezh, ken en Amerika ar C'hreisteiz, ken en Azia, ken en Afrika an Hanternoz, hag all ..., hag evel just ez eo ar skeulenn-se penn-diazez sonerezh Keltia.

En India, a-drugarez da Ravi Shankar peurgetket, ez eo en em lakaet kalz a songarourien da dreif o selloù war-du sonerezh pobl ha sonerezh klasel ar broioù indezat (21 stad-pobl hiziv-an-deiz)..

Ar pep heverkañ e-sell sonerezh Bro-India eo e vez kemmesket dalc'hmat hec'h istor gwirion gant an doueodoniezh. Istor ar sonerezh klasel indezat a grogas pemp mil bloaz bennak' zo, ha treuzkaset eo bet betek bremañ dre c'henou a rumm da rumm etre "gourou"ed (mistri) ha "shishya"ed (diskibien), petra bennak ma'z eo bet miret un tamm mat eus kelennadurezh ar vistri-mañ war skridoù savet e yezh-veur pobladoù an India : ar sañskriteg.

Hervez an hengoun, ar son eo Doue (Nada Brahma), da lavarout eo, ar sonioù ha skiant-prenet ar sonerezh a zopennadour-hent trema an emanaoudegezh. Pal uhelañ ar sonerezh a zo lakaat da ziskuliañ an dra ma vez diazezet warnañ an hollved, hag ar "raga-ou" a zo danvez a servij da veizañ an dra-se. Dre-se, dre ar sonerezh e c'heller tizhout Doue.

War ar skridoù kozh e lenner eus daou rummad sonioù : unan, anvet "anahata nad" pe "sonn nann-skoet" a zo un das-krenadenn eus an "eter" (aer glan tost da hini an neñvoù). Anvet eo ar "son nann-

skoet" dre ma ne deo ket krouet gant ur stok bennak eus an danvez, tra ma'z eo anvet "anahata nad" pe "son skoet" an hini a vez degaset gant ur stokadenn naturel bennak.

Ar son skoet a zo dezhañ un dalvoudegezh a-bouez bras hervez ar yogi-ed, rak hennezh a c'hell hag a rank bezañ klevet eus an diabarzh evit tostaat ar muiañ ar gwellañ d'ar son peurbad ha speredel.

E-touez ar sonioù skoet ez eus daou seurt anezho c'hoazh : unan "sonerezhel" da lavarout eo, habask ha plijus, hag unan all "nann-sonerezhel".

E-barzh ar "Veda"-où eo e vez kavet roudoù e-leiz eus sonerioù ha taboulinoù a bep seurt, a-gevret gant diazezoù ar sonerezh veda-el ha gant korolloù ha tonioù a-ziforc'h a seller outo e-giz gwirizioù sonerezh klasel India. Salmete veze ar meulganoù koshañ war un notenn hepken, hogen ne vont ket pell oc'h em-dreñv da ganoù, dezho div notenn, ha teir da c'houde hag hep dale e voe krouet an eizhvedenn a-raok ma vefe war an ton er c'hornog. Graet e veze "saptaka" anezhi, da lavarout eo, "boked gant seizh". Ar seizh-notenn anvet SA, RI, GA, MA, PA, DHA ha NI a zo liammet gant rannoù-korf mab-den. SA (ar benn-notenn : la tonique) gant an ene, RI gant ar penn, GA gant an divrec'h, MA gant ar bruched, PA gant ar gouzoug, DHA gant an divlec'h ha NI gant an daoudroad. Ouzhpenn-se, hervez an henskridoù e oa an hevelep hed d'an notennoù kenetrezo, hag etrezo hag ar benn-notenn ; kement-se a oa bet kavet digant youc'hoù loened' zo. D'ar mare-se e oa bet merzet gant tud lennek' zo ne oa ken 'met div notenn nemetken gant youc'hoù ha garmoù ur bochad a loened hag a laboused. Graet e vez "SA" eus an notenn "izelañ" (boutañ) anezho (hep derc'hel kont eus lec'h resis ar "SA" hervez al loened-se) ha termenet e veze e-giz-se an hed etre ar SA hag an eil notenn (ataw uheloc'h, skiltroc'h) evit kavout ar pezh a anvompi "teirvedenn, pedervedenn, pempvedenn, c'hwec'hvedenn, seizhvedenn ..." e-sell eus ar sonoriezh europat. Da skouer e vez roet un eizhvedenn gant youc'h ar pañ (eus ur SA d'egile) ; ar GA (an teir-ved notenn hag an deirvedenn) a zeu eus gouriañchenn ar c'havr tra ma c'hell an herlegon youc'hal ar bedervedenn (ar MA). Ar goukoug a vez barrek da reiñ ar

bempvedenn (ar PA), hag all ...

Er pennad-mañ ne vo ket anv eus feson ar sonerezh indezat en e-bezh, ken hir all ma vefe pep tra da vezañ displeget, hogen kontet e vo koulskoude ar perzhioù dibar a zo dezhañ e-skoaz sonerezh sevenadurioù ar c'hornog.

Ar re-mañ a vez ganto ur genreizhad sonerezh diazezet war ur c'henaoadureus tonioù ha mentadurioù, ha war elfennoù emdroad-kaer evit bravaat ar sonerezh : anao (framadurioù gant kendonioù a-bik enno) ha kendonouriezh (dasson daou son (pe muloc'h) keit-ha-keit). Sonerezh India a vez diazezet war an ton ha war ar mentadur, hogen n'eus ket dezhañ ur genreizhad anao nag ur genreizhad kendonouriezh damhefvel. Un hesonerezh eo kentoc'h, astennet, kinklet, glanaet e zavez gant doareoù soutil diniver ha dianav da sonourien ar c'hornog. Bez ez eus un dra all dishefvel-mik hervez an daou rummad sonerezh. Ur genaoadenn gornogat a c'hell bezañ diazezet war galz a livioù, arlivioù (hervez stad-spered an oberour) hag a gemm a-daol-trumma alies, tra ma vez lakaet ar pouez gant ar sonerezh indezat war ur feson, ur from hepen hag a zo kinklet, brasaet ha donaat penn-da-benn d'an hesonenn gant ar binviaouer. Rak-se e teu an efed da vezañ teogus ha boemus peurliesañ.

A-hend-all an hini n'eo ket boas ouzh sonerezh seurt-se a c'hell soñjal ez eus liv an unton warnañ. Aes eo ar respont d'ober pa ouzer ez eo kalz bihanoc'h an hedoù-etre a zisrann an notennoù er genreizhad indezat eget ar re a reer ganto er skeulgan gornogat : an div skeulgan a zo bep a eizh notenn dezho (Do, Re, Mi, Fa, Sol, La, Si, Do ha Sa, Ri, Ga, Ma, Pa, Dha, Ni, Sa) hogen ar skeulgan gornogat a c'hell bezañ lodennet e daouzek hanterdonenn (skeulenn hollzerez) tra ma'z eus daou "shruti" warn-ugent ingalet a-hed an eizhvedenn indezat, nemet n'int ket bet desket d'han divskouarn, amañ en Europa !

An doare d'ober gant ar "shruti"-où lakaet a-gevret gant un toullad mat a ripipioù hag a rikamanoù a bep seurt, ha son dibaoez eus an notennoù bourdon a laka sonerezh Bro-India da vezañ heverk koulz hag heson. Tu'zo lavarout ivez ez eo stag bremañ ouzh ar genreizhad sonerezh skeulel. An doare skeul a vez

termenet hervez an hed etre an notenn diazezet hag an notennoù all eus ar skeulgan. Talvout a ra an darempred-se da gavout an eilvedenn, an deirvedenn h.a.. Evit ma vefe komprenet an darempred-se gant ar selaouer koulz ha gant ar sonerezh eo ret d'an notenn-diazezet tregerfidi diehan penn-da-benn ar pennad. An dra-se zo kaoz ez eo an "tampoura" ken talvoudek all er sonerezh klasel indezat, peogwir e vez bepred o senif en ur reif an notenn-bourdon hag a zo an notenn-diazezet war-un-dro. Homañ a zo "maen-korn" an holl oberennoù sonerezh indezat.

N'eus ket tu da gaezel eus sonerezh ar broioù-mañ hep ober anv eus an ereoù hag an darempredoù a unvan an danvez-soner (an diskibl) hag ar soner a gelenn dezhañ ar pezh a zo bet desket ha digkouezet dezhañ pa oa diskibl e-unan. Hervez Ravi Shankar, setu amañ tri alc'houez hengoun sonerezh Bro-India : "Gourou, Vinaya, Sadhana".

Ar ger "gourou" brudet-mat hiziv-andeiz, a dalv kement tra ha mestr, rener war ar spered, kelenner. Un diskibl ne c'hell ket ober e venoz da zibab n'eus forzh peseurt gourou war ar prim, dreist penn biz. Kalz pouezusoc'h eo choaz ar gourou eget choaz ur pried, ur wech ma'z eo bet lidet an abadenn, "ganda" a liamm anezho da virviken.

Ar ger "vinaya" a dalv kement hag "uhelved", da lavarout eo, emreif an diskibl d'e vestr. Rankout a ra hennezh karout, azelufi doujañ e c'hourou hag asantif d'ar meuleidioù ha d'ar rebechoù a vo graet outañ. En India, e vez desket d'ar vugale hindouat bezañ uvel e-kefver pep den koshoc'h pe uheloc'h a renkgeta. Evel just ne vez mui kavet ar santad a "vinaya" diouzh tu ar c'hornog, met mankout a ra alies eus kostez ar reter evelato ! Hervez doare soñjal ar vistrer, ar re-mañ n'int ket a-du gant emzalc'h ar re a grog gant ar sonerezh du-mañ, dre ma'z int tuet d'ober ur mignon par dezho diouzh o c'helenner ...

"Sadhana" eo an trede ger pennañ, an trede alc'houez. Talvout'ra kement hag embregerezh, hag embleg. Kement-se a c'houl a-berzh an diskibl, ur gred don hag un emroùstet wirion d'ar gourou ha d'ar sonerezh. E-giz-se e c'hell ar soner yaouank ober e vad eus ar pezh a zo desket dezhañ gant e vestr, ha pouezus-

tre e vez ar boavezhioù kentañ evitañ, rak ret eo dezhañ kompren ha deskif dre an envor al lavarout hag an avizoù roet dre gomz gant ar gourou, da lavarout eo, anat eo, hep levr ebet, hep skrid ebet. An doare-kelenn-se a laka an darempredoù etre ar mestr hag e ziskibl da startaat.

Hogen ar genreizhad kozh-se a zo bremañ en arvar da vont da get abalamour d'ar c'henn a-bouez c'hoarvezet e doare bevañ an dud e pep lec'h war ar blanedenn. Ar sonerien apart-kenañ a zo bet ne oant ket gwall-chalet gant prederioù boutin ar boued, al lojeiz, an dilhad ... dre ma veze roet pep tra dezho gant pirvidien ha tud uhelwad' zo. D'o zro e c'hellent degemer en o zi un nebeut diskibien en doare ma vezent atav gant o labour nemetañ : deskif ha kelenn ar sonerezh.

An diskibien a oa tu dezho chom bloavezhioù-pad gant ar gourou evit deskif gantañ e servijout par ma c'hellent ha bezañ "enlouch'het" gant doare-senif ha kuzulioù o "gourou", evit o c'helenn d'o zro da c'houde. Bez' ez eus bet a-viskoazh daou rummad deskarded : ar perokoded a dreuzkase an hengoun ha netra ken, hag ar vailhed barrek da intent an hengoun evit e binvidikaat.

Hogen an traoù a zo bet kemmet kalz hiziv-andeiz ha n'eus nemet un dornad diskibien a c'hell heuliañ kentelioù o mistri, o vezañ ma vez roet yalc'hadoù dezho a-berzh ar stadrenerezh. Ret eo d'al lod vrasañ klask fred koulskoude evit dic'hoantañ o ezhommoù boutinañ. Kolllet eo neuze an amzer brizius da bleñf gant studi hag embregerezh ar binvioù-sonerezh, hag an darempredoù etre "gourou" ha "shishya" ne c'hellent ket bezañ ken frouezhus-se ken.

Bez' ez eus kudennoù all a vir ouzh an hengoun "gourou-shishya-sadhana" d'en em ober ouzh stad ar vuhez arnevez ha n'eus ket tu d'erc'hel gantañ evel gwechall-gozh. Evit ar mare n'eus bet kavet netra da ziluziañ ar gudenn.

Koulskoude, e miz Mae 1967, e voe lakaet sevel ur skol gant Ravi Shankar e Los Angeles (California) da bal dezhi skoazellañ ar re aet tik gant sonerezh India, petra bennak ma oa dav dezho gwechall dastum arc'hant evit paeañ da gantañ penn priz o beaj dre garr-nij pezh a oa ur c'holl e pep kefver evito,

o vezañ ma ne c'hellent ket kavout e-keit-se, kelenner a-zoare ebet, na kregif d'en em ober ouzh an aergelc'h, an endro nevez dishefvel-krenn diouzh doare-bevañ tud ar Stadoù-Unanet. Ar skol-se a zo bet savet a-ratozh eno dre ma soñj da Ravi Shankar ez eo prestoc'h Amerikaned d'asantif d'ar gelennadurezh-mañ a c'hell bezañ evito ur hed digor war un doare-soñjal ne vour ket o lakaat dreist pep tra ar c'hilsk war ar madoù a bep seurt. Daoust dezhi bezañ tenn da vezañ heuliet e kred Ravi Shankar evelato ez eus gant ar brederouriezh hag ar sonerezh indezat peadra da reif ar peoc'h, ar c'hempouez hag ar garantez d'an hini o c'hilsk ...

J.L. DEY

Gerioù diaez :

- Skeulenn bempnotennek = gamme pentatonique, anavezet-mat gant ar Gelted (Ré, Fa, Sol, La, Do)
- Gourou (Guru) = mestr ambrouger, "an hini a gas eus an deñvalijenn betek ar goulou". Gou = teñvalijenn, Rou = sklerijenn
- Shishya = diskibl
- Raga = hesonenn diazezet
- Yogi = an hini a glask tostaat da Zoue
- Yoga = liamm
- Veda = levr meur an Hindoued. Bez ez eus 4 Veda, diskuliet-holl gant Doue
- Penn-notenn = tonique - Teirvedenn, Pedervedenn, pempvedenn = tiêrce, quarte, quinte
- Skeulenn Hollzerez : gamme chromatique
- Shruti = micro-intervalles
- Skeulel = modal
- Notenn-diazezet = la fondamentale

al liamm

Kerwerz-hez
 EN UR RAMBREAL
 Romannt-pobla 256 pajenn
 Prix : 30 lur franko e-lec'h 40 lur

FILIPIC DERO DAVET AR SKRAMM



PADUST HAG-EN ! DEMAT D'AN HOLL ! KARL PROUDIG OUZH AR MIKRO... KOMANSET 'VO AN ABADENN GANT TONIOU DASTUMET E 1928... SONJIT'TA PEDEZH NEVEZINTI!... YA DASTUMET GANT JOS FRIMEUR!



EVELJUST! NE VO SKEUDENN EBET, MET NE VERNIEVIT ECHUIÑ E YO UR PENNAZ KAOZ GANT AR JANDARM FILIZ STROGELL, TAD-KOZH C'HOAR-GAER AN DEN EN DOA TELEFONET D'AR POLIS EVIT DISKULHAÑ E-PELECH HE DOA MAMM MESRINE PRENET PAPER-REOR UN NEBEUT BLOAVEZHIOU 'ZO!!!





PIWEZHATOC'H...

ECHU EO

?



ME!!
NETRA' VAT!
DIHUNET ON
BET TRUMM
GANT UR MELL
CHOUADENN !!
.....
N'OUZON KET
PERAK E VEZAN
TAMALLET !!
.....



D'AM SONJ, AOTROÙ PROUDIG
EZ EO UR GWENEDOUR !! ME GAV
DIN EN DEUS TRUCHET WAR
EGILE!

TRUCHET?
PENAOJ !!

N'O DEUS
GRAET
NETRA
NAG AN EIL
NEG EGILE!

DRES!
NETRA
HA
NETRA'ZO
MEMESTRA!




FAS TAGNOUS!



LUDIK-GWENDAL 1980

DIVIZ GANT GWELTAZ



Sk. P. NE

A.L.- Lavar deomp, da gentañ, peseurt hent az peus heuliet da zont da ganañ e brezhoneg ?

- Pell' zo 'm eus kroget gant ar c'han e brezhoneg, seizh vloaz' zo marteze, e 73. Da gentañ e oan o kanañ kanaouennoù mod-kozh, kanaouennoù eus Bro-Wened dreist-holl peogwir e teuen eus an Henbret War-lerc'h 'm eus klasket ober traoù un tammig nevesoc'h e brezhoneg, sevel kanaouennoù e brezhoneg ha lakaat sonerezh war varzhonegoù skrivet gant Yann-Ber Piriou pe Paol Keineg. Lakomp

A.L.- Petra' peus bet graet ? Mont da ganañ en ostalerioù, er festivalioù ? Peseurt doare sonerezh e oa ?

- E 72, e gwirionez, 'm eus kroget gant ar c'han ha bez e oa harzoù-labour 'barzh al labouradegoù e Breizh ha pedet e oan bet da ganañ evit ar vicherourien pe evit ar beizanted.

A.L.- Soñj hon eus e oa ar pladennoù "merc'hed Gregam" er juke-box gwechall, pet pladenn peus bet graet ha pe re ?

- Me 'm eus graet ur bladennig vihan da gentañ e brezhoneg, marteze an hini gentañ mod-nevez e Breizh, e ti Kelenne oa, gant, un ton kozh eus Bro-Wened "Pichon a Lovedan" kempennet en un doare nevez ha war an tu all e oa barzhoneg Trañzosean Brest kempennet en un doare nevez. Hag an dra-se oa bet goulnnet kalz gant an dud, evel just, ha klevete veze e pep tavarn 'barzh ar juke - box. An dra-se oa ar bazenn gentañ, setu, war-lerc'h em eus graet ur bladennig all e ti Kelenne ha kudennoù 'm eus bet gant an ti-se, ret e oa din dibab un ti all, setu 'm eus enrollet ur bladenn vras, ar wech-mañ e Pariz, 'barzh un ti-pladennoù bras. Met diouzhtu pa oa deut 'maez ar bladenn-se e oa ret din mont d'ober ma c'hoñje, ne oa ket tu din ober an troladoù na netra. Setu 'm eus tremenet ur bloavezh du-hont e reter Bro-C'hall ha pa oan deut en-dro, evel just, ne oa ket mui kement a lañs ganin. Nemet ar bladenn a oa bet gwerzhet mat memestra peogwir e oa bet skignet, n'eo ket e Breizh hepken met

un tammig e pep lec'h e Bro-C'hall e Bro-Alamagn, e Bro-Beljik, e Bro-Holland zoken e Bro-Aljeri. Un tri c'hant bennak a zo bet gwerzhet du-hont. Ha klevet 'vez c'hoazh an ton fromusañ eus ar bladenn - an dro hep penn na lost - war radio Alger a-wechoù. Ha setu, me' m' eus bet problemoù gant an ti-pladennoù peogwir e-pad an amzer-se m'oa ket graet troidoù evit lakaat anezhi muioc'h c'hoazh war ar marc'had ha ret eo bet din cheñch ti-pladennoù, terrifi ar c'hontrad gant Atlantic. Sinet 'm eus ur c'hontrad all gant un ti all eus Paris "Muzidisc", e 75 ar wech-mañ 'm eus savet ur bladenn all, titl ar bladenn a oa "bonedoù rus" evel just, peogwir e oa tri c'hantvet deziz-ha-bloaz emsavdeg ar bonedoù rus. Ar bladenn-se ne oa ket skignet ken mat hag an hini gentañ hag ouzhpenn-se n'eo ket bet lakaet da glevout war ar radio, n'eus ket bet bruderezh war ar c'heladennoù e-giz evit an hini gentañ ha setu n'eus ket bet kement a vrud war ar bladenn-se. Ouzhpenn-se, me'm'oa ur c'hontrad evit ur bladenn hepen. Marteze e oa re abred ivez klask ober rock e brezhoneg d'ar mare-se.

A.L.- War ar bladenn gentañ e oa "Le sort du paysan breton", e penn-kentañ e raes un tammig gant ar galleg ha bremañ hepen gant ar brezhoneg, penaos eo ?

- Ya, setu, "Le sort du paysan breton" a zo ar ganaouenn nemeti 'm eus enrollet e galleg, me 'm'oa savet kanaouennoù all e galleg d'ar penn-kentañ met dilezet em eus ar galleg penn-da-benn evit kanañ e brezhoneg, daoust d'an diaesterioù : an dibab-se a ya dreist d'ar folkloraj.

A.L.- Met n'eus ket kalz a dud evelout, dre zic'hañs, a gan e brezhoneg penn-da-benn, daoust hag a zo plas evit ur c'hanañ ha bevañ diwar kanañ e brezhoneg e Breizh bremañ ?

- Just-awalc'h, an dra-se zo diaester. Evel just, sevel kanaouennoù e brezhoneg hag ober abadennoù evel kaner e Breizh a zo un doare da lakaat ar brezhoneg er vuhez foran, e-touez an dud. Forzh penaos gant ar sonerezh e c'hell bezañ dedennet an dud memestra memes ar re ne gomprenont ket mui ar yezh pe n'int ket chalet ganti a c'hell bezañ dedennet gant an abadennoù ha bezañ dedennet gant ar brezhoneg war-lerc'h marteze. Met ur blijadur eo evidon da gentañ ober gant ma yezh, hesonoc'h a gavan, evit ar galleg. Evel just, n'eo ket aes-tre der-c'hel da ganañ e brezhoneg ha gounit da

vuhez diwar an dra-se. Ouzhpenn-se pa ganez e brezhoneg ret e vefe dit kinnig pep kanaouenn e Breizh e brezhoneg, evel just. Ar pezh 'm eus graet a-wechoù, pa oa tu d'en ober, met n'eus ket bet tu atav e lec'hioù 'zo eo un tammig re artifiel, evit lakaat an dud e-barzh ar jeu, pe gant ma eilerien a zo bet atav gallegerien, ur gudenn vras eo evit an neb en deus c'hoant kanañ e brezhoneg hag hen ober an dra-se.

A.L.- Daoust hag ez eus e Breizh tier-moulañ evit ar pladennoù a zo kouls hag e lec'h all, daoust ha ne vefe ket re kaout un dra vreizhek a vefe kalz kreñvoc'h evit ar sonerezh ?

- Ya, bez' zo tiez embann pladennoù e Breizh, bez'zo daou, pe dri, pe bevar, marteze, met bihan e chomont hag evit ober bruderezh war ar pladennoù a zeu er-maez n'int ket barrek-awalc'h : evit bevañ diwar an dra-se eo ret gwerzhañ kalz pladennoù, pe ober kalz troidoù hag an dra-se, an troidoù a zepand ivez eus brud ar pladennoù.

A.L.- Petra eo da hent e -keñver ar sevel kanaouennoù e brezhoneg bremañ ?

- Bremañ e klaskan dreist-holl kanañ kanaouennoù nevez, da lavarout eo, pe sevel ar pozioù ma-un, pe kemer testennoù zo bet skrivet gant barzhez all -ar pezh a gavan bremañ, da skouer, zo traoù eus Koulizh Kedez pe eus Gwion Letar Morligenn - hemañ dianav un tammig e-barzh al lennegezh vrezhonek ha memestra a gloc mat gant ar sonerezh a fell din ober. Sonerezh mod-nevez, gant tud eus ar vro, amañ, implij a reomp bremañ ur saks, gitaroù tredan, taboulinoù, gitaroù sec'h ivez ; chom a ra c'hoazh war ar stern ur bladenn. Met n'eo ket aes peogwir re alies, n'eus ket kalz skoazell evidon evel just. Met war-lerc'h pa vez kaoz eus sevel ur festival-hañv, ar gevredigezh-se a c'houlenn digant ur c'hener brudet eus Bro-C'hall da zont, ha, te emsaver ma'z out, arabat dit souezhañ dirak ar c'hementad a arc'hant roet d'an den-se, gwelloc'h dit mont kuit gant pemp blank pe e vo cheu ! An dra-se zo sot-awalc'h, d'an soñj, peogwir eo skoazell ar garterien a gan un doare da welout an traoù a zo un doare all da gas ar stourm

war-rack. Rak ur stourm hollek e tle bezañ hor stourm hag ur c'haner brezhonek a c'hell kaout pouez er gevredigezh gant ma vo tu dezhañ padout.

A.L.- Daoust ha ne vank ket, ouzhpenn ar c'hanaouennoù stourm, kanaouennoù evit ar pender, a vefe aes d'an dud kanañ war o labour ? Penaos ober evit ma vefegant ar vrezhonegerien kanaouennoù nevez a zeskiñt hag a rafent ganto ? Penaos de-dennañ an dud ?

- Ret eo sachañ evezh an dud war ur sonerezh kompennet mat da gentañ ha n'eo ket hepen, kemer tonioù mod-kozh. Bez'zo traoù all d'ober, perak liammañ ar c'haner e brezhoneg ouz an traoù kozh atav pe memes kompennet en-dro en un doare nevez, tu zo sevel traoù nevez, evel just, gant doare ar jazz, ar rock, ar sonerezh "klassel", an awen keltiek a bado enno.

A.L.- Petra a ra ar radio e-keñver ar c'haner e brezhoneg ?

- Re greizennet eo ar radio e Bro-C'hall, n'eo ket aes-tre tremen war ar radio e Roazhon, lakaomp, ha bezañ klevet gant an dud amañ e Breizh. N'eo ket aestre kaout darempredoù gant an dud a radio e Roazhon. Pa gefveriez gant Breizh-Veur da skouer, an dud e Bro-Skos pe e Bro-Gembre a labour e-barzh ar radio hag an tele o deus muioc'h a arc'hant, muioc'h a frankiz, evit sevel o abadennoù hep bezañ ensellet gant tud Londrez. Aesoc'h eo d'an arzourien ivez kemer perzh e labour ar radio pe an tele. Pa oan e Bro-Gembre em eus klevet e oa bet savet gant B.B.C. Bro-Gembre, ur rock-opera gant muzisianer eus Bro-Gembre e kembraeg hag an dra-se oa bet kemeret e karg penn-da-benn evit an bet kemeret e karg penn-da-leuren, pep tra oa bet kemeret e karg gant ar B.B.C. An dra-se a vefe mat, evel just, un opera-rock pe Symphonie Celtique kemeret e kar gant F.R. III Breizh, n'eo ket 'benn warc'hoazh e vo gwelet siwaz !

A.L.- Hag-eñ ez eus un hent breizhek evit ar sonerezh ?

- Ni hon eus e Breizh ur sonerezh a zo bev awalc'h c'hoazh, ur sonerezh pobl a zo bev-awalc'h c'hoazh ha pa savomp kanaouennoù nevez e chom an awen-se a-dreñv atav, ha memestra n'eo ket dav kemer skouer war ar sonerezh-se evit sevel kanaouennoù nevez gant un awen keltiek pe breizhek peogwir e teu e-un. Ret e vefe marteze en em zistagañ un tammig diouz an doareoù kozh, mat e oa adsevel ar c'han

ha diakan, ar festoù-noz hag an traoù-se met poent eo marteze bremañ ivez decup en em zistagañ un tammig diouz an dra-se.

A.L.- Daoust hag ez eus tu da veskañ pe da gempenn an doareoù e-giz m'en deus klasket Stivell ober en e simfonienn ?

- Ya, pezh en deus graet Stivell en e simfonienn a zo mat-tre, d'am soñj. Digoret en deus un tammig e spered d'ar bed-holl ; an dra-se zo mat-tre e-lec'h chom re stag ouz an doareoù kozh eus ar vro memestra, ha feal eo chomet ouz an awen keltiek war ar memes tro.




DEIZIATAER 1981 SKOL AN EMSAV

Kustumet eo deut an dud da vezañ bremañ gant an deiziataer a vez kinniget dezho bep bloaz, e brezhoneg penn-da-benn, gant Skol An Emsav.

Skeudennaouet-kaer eo bet c'hoazh er bloaz-mañ. Kavout a reoc'h e-barzh traoù ken talvoudus ha niverennoù post parrezioù Breizh, gant an holl anvioù e brezhoneg, un tamm karned, evedoc'h da skrivañ chomlec'hioù ha niverenn bellgomz ho mignoned, holl chomlec'hioù ar c'heladennoù brezhonek hag an titouroù poverusañ diwar o fenn hag all...

15 lur e koust an deiziataer er bloaz-mañ. Hen goulnn a c'hellit digant : Skol An Emsav, 8 straed Hoche, 35000 ROAZHON. Na ankounac'hait ket lakaat 15% ouzhpenn evit ar mizoù-kas. Trugarez.

LOENED GOUEZ BREIZH



ar pudask

peur e vo fin d'al lazhadeg?

Memes ma'z eus ac'hanoc'h ur foeter pradeler, ur reder istrevedoù digenvez pe un debrer kabellou-touseg e vo ret deoc'h kaout un tamm mat a chañs a-benn en em gavout gant ur pudask pe ur garaell vras o kantren disoursi dre ar c'hoadeier. Gwall rouez int an deiz a hiziv ha techet int da chaseal pad an noz. Aes eo avat kavout ur pudask war ter an hent pras pe lazhet gant ur menajer pe ur gward-maezou diboell. Ar vrud a red ez eo ar pudask ul loen noazus, loudour-pest ha flaeriu-soc'h n'eus ket e rouantelezh al loened gouez: e berr, bez ez eo enebour touet mab-den ha gant-se e ranker distruj anezhañ.

Kasit ur pudask pe ur garaell d'an ti-kêr hag e vo kinniget deoc'h un toul-lad gwennel evit ho frealziñ da genderc'hel. Ampoezon, striknin peurvuiañ pe trapou houarn a vez implijet evit pakout al loened feur-se. Diwar diviz ar chaseourien e vez implijet an ampoezon-se ganto evit diskar Alanig al louarn. Pep hini a oar koulskoude ne vez ket ampoezonet ul louarn e-giz ur c'hi pe ur c'hazh. Reche-tiñ a ra hemañ an ampoezon kerkent m'eo bet talvaet gantañ. Evit magañ e dorrad re vihan e chak hag e tebr ar boued araok e reiñ dezho. Kroc'hen luf al louarn-glaouer a blij kalz d'an drafikerien a bep ouenn, anat eo.

Piv avat a zo loariek awalc'h evit krediñ e bidennoù ar chaseourien? Ar garaell vras, ar pudask pe ar c'hi-dour a rae ul labour kompeziñ en natur; ar preizh dibabet ganto a oa peurvuiañ ul loen klañv pa ne oa ket taget gant ar gounnar. Distruj a raent ivez un toullad brav a razhed.

Sotoni hengounel ha peurbadel ar chaseour, ar bigrier hag an trafiker en deus diskaret da vat ar c'hempouez-se a oa gwechall. Nepell 'zo eo bet difennet-groñs lazhañ ar c'hi-dour! Re ziwezhat siwazh, rak ne chom hogos hini ebet e Breizh. Aet eo ar ouenn da get. Tenn eo bet ar bevañ evitañ er bloavezhioù tremenet. Bez ez eus bet saotradur ar stêrioù gant dourennoù chimik a rae d'e groc'hen dastum dour e-giz ur spoue. Ha bez ez eus bet lontegezh an drafikerien a ouie ervat pegen priziet e oa feur ar c'hi-dour e-touez mondianed ar c'herioù.

Bez ez eus c'hoazh foar ar feur e Gwengamp. Mat e vije mont da sankañ reuz er gouel-se ha difenn e vije gwerzhet tra pe dra.

Ma fell deoc'h gouzout hiroc'h diwar-benn buhez al loened gouez hag an drafikerien, lennit aketus pennad kentelius Y.An Dred e niverenn 117 AL LIAMM.

FILMOU



Plogo

"DES PIERRES CONTRE DES FUSILS"

GANT NICOLE HA FELIX GARREG

Ne oa ket bet tu din gwelout ar film-se e Festival Douarnenez, setu em eus ranket gortoz un tamm ken e vije skignet dre an egzagon a-bezh a-drugarez da ziv gevredigezh nevez savet e Breizh: Bretagne Atelier ha Polimaj. Tregont milion en deus koustet ar film ha ranket o deus ar re Le Garreg gwerzhañ un tamm douar evit kenderc'hel gant o film.

Ur film enkreuzus ha kalonekaus war un dro. Un tamm disfi am boa er penn kentañ rak gout a oar an holl pegen moredu, pegen techet eo ar film engouestlet, "militant" ma'r kavit gwelloc'h, da gas ar c'hoant kousket e berr amzer. Peurvuiañ e vez un istrogell o tibunañ ur skrid politikel ben-nak pe o klask silañ menozioù e pennoù tud deuet da glask diduamant hag a rank mont kuit gant ur boan vlev spontus. N'eo tamm ebet seurt film, dre chañs. Pledif a ra gant

an darvoudoù divoutin, bec'huis o deus lusket buhez tud Plogoñv e-pad c'hwec'h sizhun-klok. Diskouez a ra ur bobl o stourm hep plegañ hag o tiwall da vont re bell gant hent ar feulster, hent ar gouarnamant.

Dav oa 'ta filmañ an darvoudoù-se. N'eus bet nemet ar re Le Garreg evit soñjal e oa a-bouez bras diskouez ar stourm garv-se ha faskouriezh ar gouarnamant. Ar pep brasañ a zo bet moarvat bout degemeret mat gant ar bobl. Ne oant ket furlukined anezho, bretoned o vevañ er vro hag o komz yezh ar vro. Kavet o doa bod e ti Marie Carval ha gant-se o deus bet tro da gejañ gant tud ar vro.

Barradoù luziañ-pav, tud o strinkañ kuit dirak maged ar grenadennoù, tokarnioù dall gant ar c'hoant blofañ ha stervenn ouzh o chagelloù a weler alies, met e-kichen e tiskouez ar film buhez pemdeziet an dud. An dorrh vara war he leurenn o vont d'ar forn, ar pesketaer o tistreiñ d'an ostaleri gant ur pesk iskis. Rod ar vuhez o treif en desped da bep tra. Pesketaerien a zispleg pegen arvarus ar gorleoù a rez d'an dour. Lod all o laret grik ha grak ne guitaint morse o bro, kentoc'h mervel. Brezhoneg a glever ivez er film, nebeut avat. Eilskrivet eo ar

galleg war ar skramm. Un dra vat p'eo skignet ar film un tamm e pep lec'h ha pa ouzer en dije koustet re ger, war a lavare Chabrol, ober kemend-all evit ar marc'h ourgouilh. 900 milion en deus koustet ar marc'h sot-se koulskoude! Trouz arc'hant ha c'hwezh vat ne reket ket ur film mat!

Ur mailh eo Felix Le Garreg war ar filmañ ha n'emañ ket e vrud da c'hounit gantañ. Lec'h ma oa re a vec'h da filmañ en deus implijet skeudennoù ar gelaouennerien a oa eno ivez. Skeudenn ur c'hrennard leun-wad ha mouezh e vamm o ouelañ hag o youc'hal a zo fromus-tre. "Fazioù am eus graet me-mestra, " eme Le Garreg war Radio Armorique " deiz ar gwener du em eus laosket va c'hamera war an douar hag em eus redet war-lerc'h an tokarnioù d'o c'hunujennif. Fliked 'zo a selle a-dreuz ouzhin goude! "

Gant ar bobl emañ Le Garreg ha koulskoude eo ur souezh gwelout penaos eo bet filmet gantañ an darvoudoù. Gwech e vez e-touez an alouberien hag an tostañ posubl. An deiz m'eo bet arestet an alouberien gant gwez diskaret war hent al loc'h e kav deomp ez eo filmet gant ar CRSed o-unan. Ur boem. Labour Jacques Bernard, paotr ar son n'eo ket eus ar re zisterañ. Klevet vez tokarnioù oc'h huchal hag o kanañ d'an argad, a-vec'h ma ne vez ket klevet simfonienn Wagner en askell-viñs a-us, e-giz e film Coppola.

Ur benveg kelaouif dispar eo ar film-se 'hag ivez un testeni kriz eus youl tud ar vro da stourm betek ar penn. Echuif a ra ar film gant ar gerioù: "à suivre"...

Fazi brasañ ar gouarnamant hag e dropellad furlukined a oa kredif ne oa nemet lopañ war an dud evit o mougañ, kredif e oa eus merc'hed ha macouezh Plogoù tud doñv ha sentus...

UN ALI FUR : boykotit ar marc'h ourgouilh ha kit da welet film ar re Le Garreg.

TUDU




26

HOR YEZH

HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH

KELAOUENN A YEZHONIEZH SAVET E 1954
GANT ARZEL EVEN. RENER: PER DENEZ
KOUARNANT : 50 LUR DA Y. DESBORDES
1, PLASENN CH. PEGUY, POUILLBRIANT
29260 LESNEVEN. CCP 1499 51 ROAZHON



AN AMZER

AN AMZER - Kelaouenn Sizhuniek
Mererezh, Skridaozerezh : 2, Straed ar
Richardiere - 35100 ROAZHON
Pellgomz : (99) 50.52.74
K.R.P. ("Sazont") Roazhon 3133-941
C.P.P.P. 62319 - Teleks : 730.800
(Menegit hon niverenn bellgomz)

RAKPRENIT DORNLEVR K.A.D.

Un teuliad klok eo war ar gwskerezh, ar stourmerien doullbac'het, gwalloù ar bolis, ar prozezioù hag ar stourm da ren a-benn diframmañ an distaoliadeg digant ar stad C'hall da geñver votadeg prezidant ar republik.
138 pajenn titouret dispar, tresadennet brav (Goutal, Malo Louarn, Nono...) da c'houlenn ar buanañ ar gwellañ digant:
J.M. SALOMON
Plouisi
22 200 GWENGAMP
Priz: 20 lur an tamm.
Distaolioù adalek dek.

lizhiri ha kemennou

E-pad ar prosez diwezhañ (gant ar poanioù pounneroc'h eget ar re c'houlennet) he deus diskouezet ar stad c'hall he gwir zremm.

Ret eo dezhi echuif gant ar Vretoned-se, torrierien-benn anezho.

Chefchet doare argad o deus an avokad meur Colette hag ar rener Allaer, diouzh lein o fae : n'omp ket mui "nazien" (bremañ eo dispiljus-tre ar ger-se evito, hiarezherien Vichy) met tud trenk, c'hwitet ha distabil.

Neuze, perak lezel un depute PS displegañ e draoù ?

Diskleriet mat e oa bet, koulskoude, gant an avokad meur : eñ an hini a c'hell komz diwar penn politikerezh met nec'hell ket an difennerezh.

Lakaomp sklaer an traoù : bez' eus daou du. En hini kentañ ez eus Bro C'hall skinus, o sebezaf ar bed a-bezh gant he sevenadur hag he spered. En eil tu ez eus un nebeut paourkaezh genouegien n'o deus komprenet netra hag a fell dezho bezañ klevet.

Kenderc'hel a ra, ar Vretoned-se, pennekoc'h eget biskoazh, o yudal eo Bro-C'hall ivez :

- dibobladur Breizh,
- feur an dilabour an hini uhelañ er C'hwec'hkogn,
- harlu ar re yaouank,
- an nukleel profet a galon vat gant taolioù pennbizzhier ha gant grenadennoù "bromasetatek",
- al lanvioù du fonnus,
- drouklazh ar brezhoneg, buan hag aas,
- ar mougadur ferv a gouezh war pep tra a fiñv,
- hag all

Neuze, e torr ar stad c'hall o fennoù d'ar Vretoned-se n'asantont ket an dazont skedus a zo miret evito :

- ur Vreizh vraz he zraezhennoù kempenn ha naet evit an hañv,

- ur Vreizh c'hlas ma c'hello andouristed mont da bourmen en tiez-karr etre ar c'hreizzennoù-nukleel hag ar c'hampoù soudardel,

- ur Vreizh gounidigezhel barrek a-drugarez d'he dek mell mereuri, sikouret gant ar gouarnamant,

- ur Vreizh sevenadurel ma tesko ar Vretoned o treuzvefañ c'hoazh (oc'h ober war dro an "Biniawoù-Aerbouezeriou-Envorioù") penaos lavarout kenavo d'an douristed estlammet.

Petra ? N'eo ket a-walc'h evito klemm met kinnig a reont un diskoulm ?

- Ur Vreizh dieub oc'h en em verañ hag a lez ar bobl Vreizh divizout eus he dazont hag he stumm buhez.

Evit gwir, ne gompren netra ar Vretoned-se.

Flastrit din ar re-mañ ma vo echu ganto !

BRIANT Claude
GRALL Jean-Charles
Le BEVILLON Hervé
Le CURFF André
SURZUR Jacques
Prizonidi Politikel Breizhat

Rankiz evit ar vretoned toull-bae'het



27

Kenvroidi ker,

Kemenn a ran deoc'h eo bet dibabet gant Kuzul-Ren ar Greizenn Sevenadurel Vrezhon, lakast un anv d'hon oaled, a vo anvet bremañ "KREIZENN SEVENADUREL VREZHON ROPARZ HEMON".

Ne soñj ket din eo ret displegañ perak Roparz Hemon. Ma'z eus unan e touez hon tud veur, Roparz Hemon eo an hini a fell dimp heuliañ e skouer. Ne gred ket din eo bet roet e anv d'ul lec'h bennak, na kreizenn deskif, na straed, na netra, hag eo mat diskouez d'an holl, penaos e chom bev ha talvoudus e oberoñ, penaos e chom bev e envor en hon touez. "Bemdez 'm eus evito labouret start hep damant ouzh va foan" emezañ. Dimp bremañ da vont war e roudoù. Pet a skrivagnerion, prederourion, skiantourion vrezhat (Doue d'o fardono holl) a chom o anv, o buhez, o oberoñoù brezhonek kabestret ha yevet gant menoz youl ar C'hallaoued d'o flastrañ, d'o feurzistruj, dre rediañ hon pobl da venel diouzizek pe dizek e keñver hor yezh. Kasomp ar sklerijenn war bouez envel hor c'heizenn o bleustr war ar brezhoneg Roparz Hemon, Jakez Riou, Meven Mordiern, h.a.. Kement a dud o deus labouret, poanet hag aberzhet o buhez evit adsevel hor yezh. Pep hini a c'hell dibab e touez ar re anavezet, damanavezet pe dianav alies, hag e vefe mat diskouez o dellid d' ar werin. Dreist-holl ma n'int ket merket "En Istor al lennegezh". Dimp da studiañ oberoñoù diamban hon skrivagnerion di-anavezet. Ha daoust hag-eñ a-benn ar fin ne vije ket Roparz Hemon unan eus ar re-se evit ul lodenn vras eus hor c'hen-vroidi ?

Ma vije ur prezegour gouest da zont da Greizenn Roparz Hemon Gwengamp evit komz diwar benn oberoñoù hon den meur hag e vuhez, n'en dije nemet skrivañ dimp an abretañ ar gwellañ. Trugarez dezhañ en a-rack.

ROLL LABOUR KREIZENN ROPARZ HEMON :

- Meurzh noz, 20 E 30, Kentelioù Brezhoneg lennegezh : deskif a reomp lenn ha skrivañ hor yezh,
- Merc'her noz, Kentelioù Brezhoneg evit an deraouidi,
- Digoret ez eus bet ul levraoueg nevez' zo gant ur frakad (ger implijet e Gou-delin, Bringolo - Bro Ouelo o talvezout muioc'h eget ur bern) levrioù brezhoneg

ha galleg (Istor Breizh La Borderie, Skol Vreizh) o pleustrif pep danvez eus Breizh hag ar broioù keltiek. Kelaouenoù brezhoneg. Feurmet e vez pep tra 1 Lur 1 Digor e vez bep Sadorn etre 15E ha 16 E,

- Merc'her goude merenn, Skol Vrezhoneg evit ar vugale : deskif a reont komz, kanañ, lenn ha skrivañ, hag all ...

- Aozet e vo ur prede dibenn miz Here evit ar Vrezhonegerion ha mignoned ar Sevenadur Breizhek (100 den pe ouzhpenn).

- Sikour ha skoazellañ a reomp "Evid ar Brezhoneg" peogwir emañ burev ar gazetenn er greizenn, ha Diwan peogwir e vo graet an dazoned ganimp.

N'eo ket al labour a vank evel ma welit.

Hep Brezhoneg Breizh ebet,

Kenavo e karantez Breizh,

Kadoriad ar greizenn,

Mikael KORLE - Prat Kerleo
22200 PLOUMGOAR

Ho pedif a ra Yann-Fulub FOLLET da zont da welout an :

DISKOUZEDEG VRAS GENTAN A LIVOURIEZH

1980-1981 e BREIZH, aozet gantañ evit an ACADEMIE LITTERAIRE DE NANTES.

E-touez al livourien a vo a-gevret adalek ar lañ betek an 28 a viz Kerzu e Ti-Kêr KARANTEG (Bro-Leon), e c'heller envel : Yvon LABARRE (eus Savenneq, 44), kouviad en uhelañ renk - Gaetan BERTHE (Dol, 35) - Ebbe BIERBAUM (Enez Vaz, 29N) - Vonnick CAROFF (Pontekroaz, 29S) - Jean-François DECKER (Gwened, 56) - Yvon GUILLOUX (Lambal, 22) - Jacques KEMENER (Plourin, 29N) - Ernil LAUGIER (Montroulez, 29N) - Katell LE GOARNIC (An Treoù e Banaleg, 29S) - Bernard LOUEDIN (Trebeurden, 22) - Robert PRISER (Keranteg, 29N) - Shula ha Nanda TROMAN (Ploullio 'kichen Lanuon, 22)

Digoradur gant an Aotrou Maer, d'ar 6 a viz Kerzu, adalek 18 e.

Evit gouzout hiroc'h :

pellg/ (98) 72.35.00 - (98) 67.00.30

Aozer an diskouezadeg : Y.F. Follet

DAOU LIZHER A-ZIVOUT FILIPIG DERO

Kenvroad ker,

Emañ o pauez lenn war Al Lanv ar vandenn treset gant Tud-Gwendal. Penaos hoc'h eus gelllet embann seurt tresadennoù? N'int na brav na fentus. Ha c'hwi gav deoc'h e vo gwellaet live ar Vretoned gant fentigelloù lous? Ne rit nemet trevezañ ar C'hallaoued. Gwelloc'h hon eus d'ober.

Ur gelaouenn a studi eo Al Lanv pe n'eo ket? Ma kendalc'hit da embann seurt bandenoù n'eo ket dav kas ho kelaouenn ken. Spi am eus n'eo nemet ur fazi hag e vo adkavet Al Lanv evel ma oa en niverennoù kentañ.

A galon.

Noela Olier-Louarn

Keneil ker,

Gant kalz dudi em eus lennet dec'h da noz niverenn diwezhañ Al Lanv edon o pauez dege-mer.

Plijus-tre a gavan tresadennoù Tudù met un druez eo gwelout pegen dister eo a-wechoù ar senario. Da skouer ez on bet feuket gant dibenn an istor hir, ar paotr o vont d'en em skrivañ er PCF. Moarvat ne ouie ket an danevell penaos echuif e istor... Bez ez eus miliadoù ha miliadoù a Vretoned, en o zouez ur bern brezhonegerien, e-barzh ar PCF ha n'int ket holl tud sot, kemplezhed ha trelatet o spered, pell a se. Kalz o deus dibabet an hent-se evit kemma ar gevredigezh ha diazezañ ur bed gwelloc'h. Soñjal a c'hell pep hini ez eo un hent dañl ha ne fell ket da rennerien ar PCF e gwirionez chench an traoù er gevredigezh. Tu 'zo da dagañ pennoù ar PCF pe dud evel Brejnev ha n'eo, d'am soñj, nemet un tsar giz nevez, met trist eo ober goap en un doare vil ouzh an dud a ya e-barzh ar PCF (pe e-barzh strolladoù all pe ilizoù)...

Ret eo din lavarout c'hoazh pegen bourrus e kavan doare-tresañ Tudù ha spi am eus e kavo danvezioù gwelloc'h da skeudennaouif... (...)

Kalon vat a hetan dit!

A wir galon,

B. An Nailh

Abaoe ur pennad mat e oa Al Lanv o klask kaout kenlabour al lennerien. Deuet eo a-benn war a seblant. "Fentigelloù lous" hag ur farsadennig a-zivout ar PCF o deus broudet hol lennerien da skrivañ. Setu perak e vo kendalc'het gant Filipig Dero, ha spi hon eus e vo kalz lennerien all o skrivañ deomp. Skrivit diwar-benn kement tra a blijo deoc'h (pe a zisplijo deoc'h). Ne vimp ket feuket...

bremañ

KAZETENN AR STOURMOU E BREIZH

KELEIER A BEP SEURT DIWAR-BENN

BUHEZ HA STOURMOU POBL VREIZH

KOUMANANT : 25 LUR

8, straed Hoche, ROAZHON



EMBANNADURIOU AL LIAMM

ROPARZ HEMON

C'HOARIVA

C'HOARIVA I war baper keer : 42 lur

216 pajenn war baper all : 30 lur

C'HOARIVA II war baper keer : 44 lur

248 pajenn war baper all : 33 lur

SONEREZH



En em staliañ a ra e Detroit e 1943. Labourat a ra e ti Ford (eveljust!) e-pad an deiz ha c'hoari sonerezh e-pad an noz. Merzet e vez buan awalc'h gant " spierien " an tiez pladennoù. E 1948 e vez embannet e bladenn gentañ, warni " Boogie Chillen " a sikouro anezhañ da zont da vezañ kaner brudetañ Detroit. Enrollañ a raio 250 kanaouenn bennak etre 1948 ha 1955 dindan nouspet anv : Delta John, Texas Slim, Johnny Williams, Birmingham Sam hag all...

Lesanvet eo bet John Lee Hooker " Boogie King " . " Ganin eo bet krouet ar stumm boogie. Gouzout a ran ez eo ar boogie woogie koshoc'h evidon, met ur stumm sonerezh evit ar piano 'oa, ha la-kaet m'eus ar stumm-se da dalvezout evit ar gitar e-doug ar bloavezhioù 40. "



Emañ bremañ John Lee Hooker o vevañ e bro California. Bep bloaz e teu da ganañ e kêrioù bras Europa. Setu amañ un nebeut pladennoù bet graet gantañ:

- The Blues Crown CLP 5157.
- House of the Blues Marble Arch MAL 663.
- Mad Man Blues Chess CH 50 007
- That's where it's at STX 41 034

Ganet eo bet John Lee Hooker e Clarksdale (Miss.) e 1917, en ur familh unnek bugel . Pastour 'oa an tad,ha kement e rede bro ken e tilezas e wreg anezhañ evit dimeziñ gant William Moore, ur c'haner blues brudet-awalc'h eus al Louiziana, mignon da Leroy Carr ha Blind Lemon Jefferson. Gant e dad-kaer eo e tesk John Lee Hooker an doare da c'hoari gitar. Er Mississippi emañ hengoun gwirion ar blues, muoc'h eget e Stadoù all ar Su.

" Dont a ra kalz kanerien blues eus ar Mississippi " a lavar J.L.Hooker. " B.B.King, Big Bill Broonzy, Jimmy Reed, Muddy Waters ha lod all c'hoazh. Un dra reizh awalc'h eo , evit gwir. Ar Stad-se a oa an hini spontusañ evit ar re zu. Ar Stad washañ e oa... "

Kanañ a ra da gentañ gant strolladoù Gospel (Delta Big Four, Fairfield Four...), adalek 1930 betek 1936. Kuitaat a ra ar gêr davet an Hanternoz goude merv e vamm. Da vMemphis ez a. Labourat a ra en ur c'hoariva, un tu evitañ d'en em gavout gant kanerien ar merv. Daou vloaz goude emañ e Cincinnati o kanañ en ostalerioù hep kavout kalz a vruñ. Chom a raio betek 1943 eno.

GERIOU - KROAZ

JOB

kael 6

I									
II									
III									
IV									
V									
VI									
VII									
VIII									
IX									
X									


A-LED

- I. N'eo ket an hent eeun (2 c'her)
- II. Buanoc'h eget d'ar paz.
- III. A van da van e ya ar gloan da ... Da zebriñ soubenn (a-c'hin)
- IV. Kenlabourer masklet ar gelaouenn.
- V. Da zerc'hel kasketennou.
- VI. Heol saoz a-dammoù. Marvailh unan naonek a zo. Ger-mell.
- VII. Ket war an deiz. Eus cheik.
- VIII. A-raok hiziv, a-dreuz. Tud a iliz.
- IX. Daspazhi. Warmañ e kembraeg.
- X. Tachenn wadek. Tuti eilpenet.

A-ZERC'H

1. Gant ar munuzer (2c'her).
2. Dallañ.
3. Meur a hini da vogañ an diviz.
4. Eus pegement. Rannig-nac'h.
5. Plac'hig yaouank.
6. Hini boued a zegas naon. Unander tud.
7. Pezh a ra Gwenedourion gant K ha G.
8. Kador roue a vro-Leon. War ar groaz.
9. Raktresoù-beaj (2 c'her).
10. Penn karot. Du en hañv.

1									
I	P	E	N	N	O	B	E	R	I
II	E	L	F	E	N	N	F	E	M
III	N	Z	D	O					
IV	N	B		A	N	A	L		
V	F	O		R	R	A	D	E	N
VI	O	N	T	A	R	I	A	N	E
VII	L	O	S	T	I	G	A	N	T
VIII	L	B		O	R				
IX	I	T	A	L	I	A	M	I	R
X	N	E	T	R	A	S	P	I	E



TELEUE



TUDU